



# EURIPIDES

## ALKESTIS

**Troet diwar ar gresianeg gant**  
**YOUENN OLIER**

**PREDER**  
Kaier 101  
Du 1967

# **EURIPIDES**

# ALKESTIS

**Troet diwar ar gresianeg gant**  
**YOUENN OLIER**

**PREDER**  
Kaier 101  
Du 1967

A L K E S T I S

*g a n t*

E U R I P I D E S

Troet diwar ar gresianeg

gant Youenn OLIER

## K E N T S K R I D

Kent kinnig d'hol lennerion pezh-c'hoari EURIPIDES, Alkestis, e ve mat marteze reiñ un nebeut resisadurioù a-zivout an aozour, ar c'hoariva gresian, ar pezh-c'hoari e-unan.

## EURIPIDES

Ganet e voe EURIPIDES e Salamine, hervez a gonter e 480 a-raok Hor Salver, dres da zeiz trec'h ar C'hresianed war ar Bersed. Lavarout a reer c'hoazh en em gave AESKULOS el lu gresian trec'h e Salamine, hag e oa SOFOKLES, hag eñ krennard c'hoazh, o ren ar Pean e lidoù an trec'h. Kement-se n'eo ket marteze gwir-tre, hogen reizh eo moarvat warbouez nebeut, hag aes-kenañ evit lec'hiañ an tri dramaour gresian an eil e-keñver egile, en amzer da nebeutañ.

Ma chom dispis a-walc'h bloavezh ganedigezh EURIPIDES, ne ouzer ket kalz gwelloc'h a be orin e oa, ganet en un tiegezh a renk uhel hervez lod, mab marc'hadourion vihan hervez lod all.

Bevañ a rae en Aten, ma reas e studioù; dedennet e oa gant ar brederouriezh, hag ez anaveze pennvennozioù prederourion veur ar mare, hep bezañ avat diskibl hini ebet anezho. Kement-se a zo aes da anataat en e oberenn.

Nebeut a dra a zo da lavarout a-zivout e vuhez, a voe, evit a ouzomp, eeun ha sioul, daoust d'an daou zimeziñ ha d'an tregasoù tiegezhel a roer brokus dezhañ.

Gouzout a reer hepken ne gemeras ket perzh e buhez politikel Aten, pe, reishoc'h, ne sammas karg ebet. Echuiñ a reas e vuhez e Pella, e Makedonia. Droukrañs a vage ouzh e genvroiz a rae fae war e c'hoariva d'ar mare-se. Taget e veze ivez gant ARISTOFANES en e bezhiou-c'hoari. Met piv ne oa ket taget gant ARISTOFANES ?

Penaos avat e voe degaset d'ar c'hoariva ? An titouroù a ra diouer deomp war ar poent-se ivez. Gallout a reer lavarout e lakaas c'hoari e bezhiou kentañ e 455 moarvat. Ne ziskrogas ket goude a sevel pezhioù-c'hoari, tragediennoù ha dramaoù.

Divent e oa e oberenn e gwirionez, enni naogont pezh-c'hoari. Eitek anezho a anavezomp hepken.

EURIPIDES n'en devoe ket an eurvad da blijout kalz d'e genvroiz, ha n'en devoe ar priz kentañ er c'henstrivadegoù nemet ur pemp gwec'h bennak.

AR C'HOARIVA GRESIAN

Danvez ar c'hoariva tragek en Hellaz a veze an hen-vojennoù stag ouzh pep keoded, o kounañ en em astenne Hellaz war an daou du eus ar Mor Enezek, en Europa hag en Azia. Mojennoù Argos a adkavomp e triadenn AESKULOS, mojennoù Teba en Antigona, istor Troia en Troiaadezed, ur vojenn eus Tesalia en Alkestis.

Meur a dra a veze empleget gant seurt danvez. Diskouezet e veze war al leurenn doueed, harozed, roueed vrudet kar alies da Re an Nec'h pe Re an Traoù. Ouzhpenn-se e veze anavezet mat gant an arvesterion danvez pep pezh-c'hoari. Ne zeuent ket evit gouzout petra a c'hoarvezfe, met penaos e vefe displeget, evit tañva arz an aozour, evit ar blijadur da welout, e-pad un nebeut eurvezhioù, bev dirazo o doueed, o harozed, a santent a-hend-all ken tost outo.

Ret eo ivez dere'hel soñj eus ster relijiel ar c'hoariva gresian. Ul lec'h pouezus a zalc'h e azeulerezh an harozed vroadel. C'hoariet e veze tragediennoù ha dramaoù en Aten e degouezhioù resis, da geñver gouelioù Dionizos. Ur genstrivadeg a veze aozet neuze etre tri skrivagner a zlee kinnig teir zragedienn oc'h ober un heuliad, un driadenn, hag un drama. Euan a-walc'h ez emdroas ar reolennoù : pep tragedienn a zeuas da vezañ distag, hag e-lec'h an drama e voe degemeret pezhioù un tammig hiron, gant trivli ha gwall-urioù, hogen oc'h echuiñ mat. Alkestis dres a zalc'he lec'h un drama.

Prizioù arouezel a veze roet d'an aozourion. Ne c'hoarvezas ket alies gant EURIPIDES, ha pa ginnigas Alkestis gant tri fezh all n'en devoe nemet an eil plas war-lerc'h SOFOKLES.

ALKESTIS

C'hoariet e voe Alkestis moarvat e 438, e-lec'h an drama. Hogen n'eo ket alese e teu an diskoulm eürus hag un nebeut elfennoù all, evel Herakles mezh o kanañ e palez Admetos. EURIPIDES a zo boas da echuiñ mat e bezhiou-c'hoari. Abaoe AESKULOS en doa emdroet ar c'hoariva gresian. Lusket an ober ne oa ket ken gwask an Tonkadur war an tudennoù, met ar from hag an trivli.

Gallout a reer gwelout en Alkestis, er vojenn desalian a zo danvez an oberenn, ar stourm ouzh an Ankou. Sevennet eo amañ unan eus c'hoantoù donañ an den : trec'het eo Tanatos. Mar deo se ster gwirion ar vojenn, n'eo ket ar peñ pouezusañ evit EURIPIDES. A-walc'h e oa evitañ studiañ e dudenoù en enkadenn m'o laka an Tonkadur. An diwezh eürus, dleet da vadelezh un doue, Apollon, ha da nerzh un haroz, Herakles, a zo un digarez evit ar barzh da gas betek ar penn e enklask war emgev an den dirak ar marv.

6

Sed aze moarvat ar pep heverkañ. Kondaonet eo Admetos gant an doueed. Apollon a zeu a-benn da saveteiñ anezhañ, gant ma kavio Admetos un den all evit mervel en e lec'h. An holl a nac'h, nemet e wreg, Alkestis. Adalek derou ar pezh-c'hoari e oar an holl petra a c'hoarvezo. Hogen dis-heñvel eo kaout un anaoudegezh veizel eus an traoù hag o buhezañ.

EURIPIDES a studi emzalc'h an div dudenn bennañ, Admetos hag Alkestis, dirak an darvoud. Dibar eo emgav pep hini.

Alkestis a asant mervel e-lec'h he gwaz dre garantez, dre ma oar ivez ez eo pouezusoc'h evit ar gevredigezh buhez ar paotr eget buhez ur plac'h. En em aberzhiñ a ra e-kreiz he yaouankiz, pa he doa dirazi c'hoazh bloavezhioù hir. An aberzh-se a zo deuet da vezañ he flanedenn; he degemerout a ra. N'eo ket hep kerse avat e kuitaio ar vuhez; a-walc'h eo kounañ he c'himiad d'ar gouloù-deiz evit henn kompren. Hogen n'eo ket gant ar pezh a vo he "buhez" e tiez Hades ez eo prederiet, gant ar re a lez war he lerc'h, he bugale pergen, ne lavaran ket. War he zremenvan e ro da bep hini ar pezh a zo dleet : lidoù d'an doueed, he daeroù d'he c'hambri ha d'he gwele; ur ger a vignoniezh d'ar vevelion. Deuet war al leurenn evit ar wech kentañ ha diwezhañ e klask peururzhiañ an traoù, lakaat pep elfenn en he lec'h. Hag hi prest da vervel ne lavar ket ur ger didalvoud pe dister, hepken ar pezh a zo endalc'het gant hec'h aberzh : bevañ a raio da viken e kalon he gwaz na gemero morse un eil gwreg. Pelloc'h ez a, o sammañ warnañ ur gefridi uhel : fiziout a ra ennañ he bugale, priziusat donezon.

EURIPIDES en deus gouezet aze livañ skeudenn genedus ha hoalus ur vaouez enni donezonoù ar yaouankiz ha furnez un oad koshoc'h, na c'hellomp ket chom diseblant dirazi.

7

N'eo ket hep abeg eo bet kemeret hec'h anv da dalbenn ar pezh-c'hoari, zoken ma welomp Alkestis nebeut-tre; he bezañ a ren war leurenn ar c'hoariva.

En he c'hichen e hañval gwanoc'h tudenn Admetos. Pell eo eñ da vezañ seder ha meurdezus. Klask a ra padal, panave nemet dirak Herakles a c'houlema da biv e vez douget kañv er palez.

Un emzalc'h eo a-berzh Admetos, ne zeu ket eus don e ene, evel evit Alkestis. Asantet en deus da aberzh e wreg, ha diaesoc'h a-se en em gav moarvat. Reizh e hañval dezhañ bezañ; hogen deuet ar mare e kompren petra dalvez marv e wreg : un ezvezañ da viken, ar palez goull, an digenvez evitañ. Diboc'h e c'haller e gavout, rak disoñjal a ra d'ar mare-se an divizoù lakaet gant an doueed. Ne wel ken nemet an darvoud na c'hell ket degemerout. Aspediñ a ra Alkestis da chom gantañ. Diwezhaoc'h e vallozh e dad en deus nac'het mervel en e lec'h, e spered Admetos ez eo zoken e lec'h Alkestis; rebech a ra garv outañ e emgarouriezh, hep gwelout ez eus d'e emzalc'h dezhañ ivez an hevelep andon. Met ne c'haller ket tamall kement-se da Admetos. En un enkadenn emañ, paket etre daou dra ken heugus an eil hag egile, ha ken didec'hus : mervel, pe asantiñ da varv Alkestis. Nac'hañ a ra an eil hag egile, gant e holl nerzh, en aner, evel just. Alkestis en enep he deus dibabet, hag ez asant hep en em sevel da heuliadoù he dibab.

Daoust d'e wanoù e chom Admetos un dudenn dedennus. Un elfenn vugelel a zo ennañ, hag en abeg da se e pardoner dezhañ bezañ asantet da gantañ da varv Alkestis, ha bezañ e nac'het goude. Gouzañv a ra evel ur bugel, o youc'hal, o fuloriñ, o klask egin ar boan hep gouzout emañ ennañ. Gouzañv a ra garv, divarrek m'emañ da heuliañ skouer e wreg en ur vont pelloc'h eget e boan.

E dibenn ar pezh-c'hoari padal e tosta ouzh Alkestis; war an hevelep live ha hi en em gav, pe dost, dre ma nac'h eeun ha start kinnig Herakles, hep frazennoù pompadus, hep stirlink ar gerioù. Deuet eo ar mare da vevañ hep Alkestis, da zerc'hel d'ar promesaoù graet dezhi, hag e talc'h. EURIPIDES en deus kaset betek ar penn studi kalon e dudenn; degemer a ra an diskoulm eürus a glot a-hend-all gant ar vojenn desalian.

En-dro d'an div dudenn bennañ emañ ar vevelion, tud dister marteze, hogen a gloka ar skeudenn skedus hon eus eus Alkestis. Feres, tad Admetos, hag a zifenn ken garv ar gwir en deus da vevañ daoust d'e oad, tudenn Herakles, paotr mat, keneil feal ha madelezhus dindan diavaezoù un tammig gros, a ziskouez deomp anat ar pezh a spurmanter dre studi Admetos hag Alkestis : n'eus ket eus ar pezh-c'hoari-mañ un oberenn hael evel ar c'hoariva gresian dre vras. Disoñjal a reomp ez eus roueed ha doueed war al leurenn. Tud hepken a welomp, pezh hon tizh muic'h emichañs. Nebeut-oc'h a nerzh a zo moarvat en Alkestis eget en Elektra gant SOFOKLES; tostoc'h a-se emañ ouzhomp marteze.

o

Setu e berr un nebeut elfennoù eus ar pezh-c'hoari en deus dibabet Youenn OLIER treiñ diwar ar gresianeg.

Ha gallout a reer en em c'houlenn perak treiñ ar c'hoariva gresian ? Degas a rafen da soñj e krog Ur Breizhad oc'h adkevout Breizh gant pennadoù diwar-benn TAGORE ha GANDHI.

An abeg ? An hevelep hini eo.

Pierrette KERMOAL

o o o

T u d a r c' h o a r i

HERAKLES

APOLLON

AN ANKOU, doue ar marv

ADMETOS, roue Feres, kêr eus Tesalia

ALKESTIS, gwreg Admetos

EUMELIOS, mab Admetos hag Alkestis

FERES, tad Admetos

AR VATEZH

AR MEVEL

AR C'HOR

Emañ ar c'hoari e Feres.

## APOLLON

O ti Admetos e-lec'h e rankis, ha me doue, debriñ va zamm boued ouzh un dacl c'hopriddi ! Ha Zeus an hini eo a voe kiriek da se : lazhañ a reas va mab Asklepios dre stlepel outañ e foeltr e-kreiz e vruched. Droug a yeas annon avat, ha me da lazhañ ar Gukopled a bourvez e dan da Zeus. Labourat a ris a-benn neuze e servij un den marvel, rediet ma oan gant va zad, evel kastiz an torfed-se.

Degouezhet er vro-mañ e oan mesaer va ostiz hag an tieg-ezh-mañ a ziwallis betek an deiz a hiziv. Gant un den glan, ha me glan va-unan, on degouezhet : mab Feres eo hag e dennet em eus a-dre skilfoù ar marv en ur douellañ Merc'hed an Tonkadur. Degemer a reas an doueezed ez afe Admetos diouzh ur marv tost ma pourchasfe un den all da vervel en e lec'h da Re-An-Traoñ. E holl geneiled en deus aterset eta an eil war-lerc'h egile, gruet en deus ar gont anezho : e dad deut kozh hag e vamm he deus e c'hanet; hini ebet ne gavas, nemet e wreg hag a garas mervel en e lec'h ha chom hep arvestiñ ken ar goulou. Houmañ a zo bremañ war he zremenvan, dalc'het a dro gazeliad gant ar re a zo war he zro. Rak en deiz-mañ eo tonket dezhi mervel ha diouerñ ar vuhez. Me avat evit chom hep bezañ kousiet e nep doare er palez, a zilez goudor karet an ti-mañ. Setu ma welan dija nepell ac'han Ankou, beleg ar re varv hag a zle he c'has war-du an Traoñ betek tiez Hades. Emañ degouezhet d'an eur rik hag eñ o c'headal a wera zo an deiz-mañ ma rankfe hounnezh mervel.

(An Ankou a zeu tre gant ur c'hleze, barvet ha divaskellet, Gwisket eo e du.)

C'HOARIGAN

AN ANKOU

A! A! Petra emaut oc'h ober dirak ar palez ? Perak emaut o kantren dre amañ, Apollon ? Direizh out adarre o laerezh hag o skrapañ dreistgwirioù Doueed-An-Traoù. Ne voe ket a-walc'h dit herzel ouzh planedenn Admetos o trabellat Merc'hed-An-Tonkadur gant da gorvigelloù ? Emaout bremañ c'hoazh, armet ha krog da zorn en ur wareg, o sevel gward war-dro ar vaouez-mañ, merc'h Pelias, a ouestlas he buhez da zieubiñ he fried diouzh ar marv.

DIVIZ

APOLLON

Bez dizaon : reizh on hag abegoù mat am eus.

AN ANKOU

Perak neuze ec'h eus ezhomm a gaout ur wareg mard emañ ar gwir ganit ?

APOLLON

Boas on da gas bepred gamin ar benveg-se.

AN ANKOU

Ha boas out ivez da reiñ skoazell d'an tiegezh-mañ a-enep d'ar gwir ?

APOLLON

Diaes eo din gouzañv drougeurioù un den tost d'am c'halon. Setu.

AN ANKOU

Daoust ha lemel a ri diganin an eil kelan-mañ ?

APOLLON

Hogen an hini all zoken n'em eus ket tennet diganin dre heg.

AN ANKOU

Penaos neuze emañ war-c'horre an douar ha n'eo ket dindan?

APOLLON

E bried en deus roet en eskemm; hounnezh out deut da gerc'hat bremañ.

AN ANKOU

Ya, hag he c'has a rin, sur, e don an ifernioù.

APOLLON

Kemer-hi ha kerzh kuit eta : n'ouzon ket ha da gen-drec'hiñ a rafen da ...

AN ANKOU

... Da lazhañ an hini a zleam ? Bez' e rafes, rak roet eo bet din ar gefridi-mañ.

APOLLON

Nann, hogen da c'hourzezañ marv ar re a zle mervel.

AN ANKOU

Meizañ a ran; displeg eta da vennoz ha da c'hoantad.

APOLLON

Daoust ha tu a zo e tizhfe ilkestis ar gozhni ?

AN ANKOU

N'eus ket. Bez asur e fell din ober va mad eus va c'hargoù.

APOLLON

Forzh penaos, n'out ket evit kemer ouzhpenn un ene.

AN ANKOU

Diouzh marv ar re yaouank e tennan brasoc'h enor.

APOLLON

Ha ma tremen hag hi gwrac'h, gant lorc'h bras e vezo douaret.

AN ANKOU

Evit ar re binvidik e savez al lezenn-mañ, Apollon.

APOLLON

Petra ac'h eus lavaret ? Daoust hag un arguzer out hep gouzout deomp ?

AN ANKOU

Ar re a c'hallfe henn ober a brenfe ar gwir da vervel ez kozh.

APOLLON

Ne blij ket dit eta reiñ din ar goulenm-mañ ?

AN ANKOU

Tamm ebet ! Anavezout a rez va zemz-spered.

APOLLON

Gran. Enebour d'ar re varvel ha kasaet gant an doueed !

AN ANKOU

Ne c'hallez ket kaout ar pezh a rankez chom hep kaout.

APOLLON

Hama ! Me ' respont mat dit : paouez a ray da grizder, pegen bras bennak e ve. Un den a zeuio da diez Feres : kaset eo gant Eurusteus da vleniañ en-dro d'ar gêr eus tachennoù Bro-Drakia o goañvoù garv javed sterniet ouzh ar c'harr. Degemeret e vo evel ostiziad e ti Admetos hag eñ an hini eo a ziframmo dre heg ar vaouez-se diganit. Ha ne zleuin dit e-giz-se anaoudegezh-vat ebet daoust ma'z po graet pezh a c'houlennan. Hogen da gasaat a rin evelato.

AN ANKOU

Evidout da lavarout traoù e-leizh ne c'hounezfes netra muioc'h. Pezh a zo sur eo e tiskemmo ar vaouez-mañ betek tiez Hades. Mont a ran daveti evit he sakrañ gant va c'hleze. Gouestlet eo d'an doueed isdouarel neb m'en deus va c'hleze puraet blev e benn.

PARADOS / C'HOARIGAN

(Biltoniet eo ar ganerion gant ar fleüt.)

AR C'HORVLENIER

Petra a lavar ar sioulder-mañ dirak ar palez ? Perak emañ didrouz ti Admetos ? Ha n'emañ tost hini ebet eus va c'heneiled a c'hallfe lavarout deomp ha dleout a ra ar rouantelezh leñvañ d'an hini varv pe daoust ha bevañ c'hoazh ha gwelout ar gouloù-mañ a ra Alkestis hag a zo d'am soñj ha da soñj an holl ar wreg wellañ e-keñver he fried a zo da gavout er bed ?

AR C'HOR

Daoust ha klevout a ra unan bennak pe ur gunuc'hadeg pe kenstok an daouarn er c'hambroù pe un difronkadeg evel pa vefe peure'hraet pep tra ? Mevel ebet zoken n'emañ en e sav war dreuzoù an nor. Gant ma c'hallfes en em ziskouez, o Parseer, da zistreiñ lanv an Tonkadur.

KENTAÑ HANTER AR C'HOR

Ne rojent ket peoc'h ma vije tremenet.

BIL HANTER AR C'HOR

Emañ divuhez endeo.

KENTAÑ HANTER AR C'HOR

Koulskoude n'eo ket deut c'hoazh he c'horf eus ar palez.

BIL HANTER AR C'HOR

Digant piv e ouzout an dra-se ? N'em eus ket fiziañs : piv a ro kalon dit ?

KENTAÑ HANTER AR C'HOR

Pennos en dije graet Admetos obidoù digenvez d'ur vaouez hael evel houmañ ?

AR C'HOR

Dirak an nor ne welan ket dour eienenn ar puraat evel m'eo ar boaz hel lakaat e toull-dor ar re aet da Anaon. Kuchennad blev troc'het ebet n'emañ er raksal, evel m'eo ar c'hustum ober pa leñver war ar re varv. Maouez yaouank ebet ne ra trouz o skeiñ gant he dorn ouzh he bruched.

BIL HANTER AR C'HOR

Setu avat an deiz tonket ...

KENTAÑ HANTER AR C'HOR

Peseurt lavar a laoskez ?

BIL HANTER AR C'HOR

... ma ranko-hi mont dindan an douar.

KENTAÑ HANTER AR C'HOR

Fromet ec'h eus va ene, fromet ec'h eus va spered.

BIL HANTER AR C'HOR

Pa vez e kañv an dud a galon e rank glac'harifi kement hini a zo brudet a-viskoazh da vezañ un den reizh.

AR C'HOR

E neb lec'h eus an tir m'en dije unan kaset e lestr, pe e Lukia, pe e chomva dizour Amnon ne saveteo buhez ur vaouez dizeur. Rak tostaat a ra ar mare dic'hourzezus. N'ouzon mui war-du noter pe sous treñ evit lidlazhañ deñved. N'eus nemet gant mab Foebos, ma welje c'hoazh ar gouloù, e teuje-hi en-dro o tilezel chomvaoù teñval ha dorioù Hades. Daskorifi d'ar re dremenet ar vuhez a rae hemañ a-rack dezhañ bezañ skoet gant daret entanet ar foeltr stlapet outañ. Bremañ avat, peseurt spi a vuhez a zegemerfen c'hoazh ?

AR C'HORVLENIER

Rak pep lid a zo bet sevenet gant hor roue; war aoterioù an doueed eo bet peure'hraet an aberzhioù gwadus. N'eus louzoù ebet ken d'hon drougeurioù.

(Dont a ra ur vatezh en ur ouelañ er-maez eus ar palez.)  
(Gant ton an diviz)

Setu bremañ avat unan eus ar mitizhion o tont en ur ouelañ. Peseurt darvoud a glevin ?

(Ouzh ar vatezh :)

Kañvaouiñ pa c'hoarvez un drouklamm bennak gant hor mistri a zo da zigarezifi. Gouzout a garfemp dreist-holl avat

ha bev c'hoazh pe varv eo ar vaouez.

AR VATEZH

Lavarout a c'hallez ez eo bev ha marv war un dro.

AR C'HORVLENIER

Ha penaos e c'hallfe-hi bezañ marv ha gwelout ar gouloù?

AR VATEZH

Emañ stouet he fenn ganti dija; war he zremenvan emañ.

AR C'HORVLENIER

Â reuzeudig ! Hag eñ ur seurt den koll ur seurt maouez !

AR VATEZH

Ne ouezo ket pebezh koll eo dezhañ kent bezañ gouzañvet diwarnañ.

AR C'HORVLENIER

Spi ebet ken ne chom da saveteiñ he buhez ?

AR VATEZH

Ne chom ket, rak deut eo diharzus an deiz tonket.

AR C'HORVLENIER

Pourchaset eo eta an traoù dereat e sell dezhi ?

AR VATEZH

Emañ prest kinkladur an obidoù.

AR C'HORVLENIER

Gouezet-hi bremañ e varvo gant klod hag ar wellañ a bell eus an holl verc'hed a gement a vev dindan an heol.

AR VATEZH

Penaos ne vije ket ? Piv henn nac'ho hag a gredo lavarout n'eo ket hounnezh ur vaouez difistur ? Penaos e c'hallfed diskouez brasoc'h tenerded evit ur pried eget dre asantiñ da vervel en e lec'h ? Hag an dra-se moarvat a oar ar gêr en he fezh. Kement a reas en ti-meur avat a glevi gant estlamm. Rak pa verzas e oa deut deiz an tonkadur e walc'has he c'horf gwenn e-barzh dourioù ar stêr ha goude kemer e-barzh he c'hambro koadet e sedrez he dilhad

hag he bragerizoù en em fichas a zoare hag o chom en he sav dirak an oaled e pedas evel-henn : "Â Rounez ! Emaon o vont da ziskenn dindan an douar. Rak-se az aspedin war va daoulin evit ar wech diwezhañ da ober war-dro va bugale emzivat. Da hemañ ro ur bried karantezus ha da hounnezh ur gwaz a galon. Ha ra chomint hep koll o buhez e-kerz o bugaleerezh hag hep mervel, pa n'eo ket koulz, eveldon-me, hag o ganas, hogen ra beurvevint ur vuhez wenvidik ha ra vezint evurus e bro o zadoù." Ouzh an holl aoterioù en o sav e-barzh ti-meur Admetos e tostaas, garlantezioù ganti da lakaat warno ha pediñ a rae tra ma strewe delioù skourroù ar veurta, hep leñvañ na keinal. Ar walenn o nesaat ne wall-gemmas ket he liv heneuz dre natur. Neuze avat en em daolas war he gwele er gambr; eno e stagas da ouelañ hag e lavaras kement-mañ : "Â wele e-lec'h e kimiadis diouzh va buhez plac'h yaouank o tiskoulmañ va gouriz gwerc'hez evit an den ma varvan en e lec'h, kenavo ! N'az kasaan ket; va c'holllet ac'h eus avat, ha me hepken : dre ma n'em eus ket kredet bezañ diwirion dit eo e varvan. Dit e vo perc'henn ur vaouez all bennak. Ne vo ket furoc'h egedon a-dra-sur; evurusoc'h avat e vo he flanedenn marteze." Hag hi o kouezhañ war bennoù he daoulin da boket dezhañ. Glebiañ a reas ar gwele pen-da-benn gant lanvezhad daeroù he daoulagad. P'he devoe gouelet he gwalc'h ez eas kuit ha pellaat a reas diouzh ar gwele soublet he fenn ganti. Hogen a-greiz mont er-maez eus ar gambr e teuas war he c'hiz hag en em strinkañ a reas adarre war ar c'holc'hed. Ar vugale avat, o pegañ e sae o mamm, a leñve. Hag hi d'o c'hemer war he barlenn ha d'ober lazic dezho. An holl goskor a leñve en ti, truez enno ouzh o mestrez. Astenn a rae houmañ he dorn da bep unan ha ne oa nikun pegen divrud bennak e vije m'he defe tremenet hep komz outañ ha n'en defe ket lavaret dezhi un nebeut gerioù d'e dro. Sed ar gwalleurioù a zo e ti Admetos : hag eñ marv n'en

defe graet nemet koll ar vuhez; aet eo diouzh taol an Ankou hogen krog e vo ennañ ken bras enkreuz ma ne vo biken ankoun-ac'haet gantañ.

AR C'HORVLENIER

Siwadiñ a ra emichañs Admetos dirak seurt gwalleurioù ma rank dioueriñ ar vaouez dispar-se.

AR VALTEZH

Leñvañ a ra en ur zerc'hel e wreg vuiañ karet etre e zivrec'h hag he fediñ a ra da chom hep e zilezel, o klask an dic'hallus. Gweñviñ ha dizeriañ a ra diwar he c'hleñved ken ez eo peurzinerzh, ur samm leun a zoan d'an divrec'h he doug. Padal, eviti da dennañ a-boan hec'h anal a-benn bremañ, e venn sellout ouzh bannoù an heol. (Rak biken mui ne ray hogen ar wech-mañ eo ar wech diwezhañ holl ma arvesto skinoù ha kantenn an heol.) Mont a rin avat ha kemenn a rin emaut amañ : n'eo ket stag a-walc'h ouzh o renerion kalon an holl dud evit damantiñ ha bezañ tener outo en un doare bennak pa vezont gant an dizeur. Te avat a zo ur c'henseil mat d'hor mistri.

(Ar c'hor o kanañ.)

KENTAÑ HANTER AR C'HOR

Â Zeus ! Pe ode a zo ma c'hallfe mont kuit drezañ hon drougeurioù ha dont an dieubidigezh diouzh an tonkadur a zo o waskañ hon arc'hivistri ?

BIL HANTER AR C'HOR

Daoust ha dont a raio er-maez unan bennak pe daoust ha troc'hañ a rin va blev ha gwiskañ a raimp en-dro deomp ar gouelioù-kañv ?

KENTAÑ HANTER AR C'HOR

Â vrenin pareer ! Steu un ijin bennak a-enep da zrougeurioù Admetos. En pourchas deomp. A-rack an deiz-mañ,

diagent, ez poa e bourchaset. Eremañ adarre, bez an Dieuber diouzh ar marv; harz ar muntre Hades.

BIL HANTER AR C'HOR

Siwazh ! Siwazh ! Â rab Feres ! Pebezh droukplanedenn a zo degouezhet ganit peogwir eo lamet diganit da bried.

KENTAÑ HANTER AR C'HOR

Daoust ha n'eus ket peadra d'en em gontellañ ? Ha mont dreist e vefe nesaat ouzh ar c'houzoug ul las a-istribilh er vann ?

BIL HANTER AR C'HOR

Rak n'eo ket da wreg karet hogen da wreg vuiañ karet e selli outi hag hi marv en deiz-mañ.

(Digeriñ a reer dor ar palez. Alkestis a zegouezh; emañ war-nes semplañ. Daou vugel krog e gouel Alkestis a zeu da heul; war o lerc'h mevelion ha mitizhion.)

AR C'HOR

Sell, sell ! Sed hi o tont er-maez eus an ti a-gevret gant he fried. A ! Garm ha difronk, tir Feres, war ar vaouez wellañ a zo, diviet gant ar c'hleñved hag o vont da ziskenn dindan an douar betek tiez isvedel Hades.

C'HOARIGAN

ADMETOS

Allaz ! Ar gomzenn-mañ a gavn a glevan ha gwashoc'h eo din eget ar marv e-unan. A ! En anv an doueed, na c'houzañv ket va dilezel, en anv da vugale e ri emzivadenn anezho; hogen sav en-dro, kemer kalon en-dro : rak ma varvfe ne vefe mui ac'hanon; diouzhit eo hor buhez hag hor marv. Da denerded evidomp a gehelomp.

(Gant ton an diviz)

ALKESTIS (o tiseemplañ)

Admetos, gwelout a rez penaos emañ ar bed ganin. Bez' e

fell din lavarout dit kent mervel pezh a vennan. Dre m'az toujen eo em eus roet en eskemm va buhez evit aotren dit gwelout ar goulou; ha setu m'emaon o vervel pa'm boa ar gwir da chom hep henn ober ez lec'h; hogen er c'hontrol em boa koñje da gaout da waz e-touez Tesaliz an hini a garen ha gallout a raen ober va annez e-barzh ti gladus ur roue; ne fellas ket din avat bevañ disrammet diouzhit war va zro bugale emzivadenn, ha n'em eus ket armerzhed don-ezonoù ar yaouankiz ma kemeren dudi enno. Padal an hini az engehentas hag an hini az tegasas d'ar bed, az tilezas pa oa brav dezho mervel, deut ma oant d'ar poent eus ar vuhez ma ranker henn ober ha pa oa brav dezho ivez saveteiñ o mab ha kaout ur marv brudus. Rak o unvab e oas ha spi ebet ne chome dezho, goude dit mervel, da gaout bugale all. Ha te ha me a vevje hiviziken, ha ne leñvjes ket goude dioueriñ da bried ha ne rajes ket emzivadenn eus da vugale. Hogen kement-se a ragozas unan eus an doueed evit ma vefe an traoù evel m'emaint. Evel-se bezet graet. Te avat, dalc'h koun eus va aberzh ha bez anaoudek din en abeg dezhañ. Goulenn diganit kement ha ma roan-me ne rin biken : rak n'eus tra priziusoc'h eget ar vuhez; traoù reizh a c'houl-ennin avat e-giz ma anzavi-te da-unan; rak ne garez ket ar vugale-mañ nebeutoc'h eget a ran-me, mar dout fur. D'ar remañ ro aotre da vezañ ar vistri er gêr; na ro ket dezho ul lez-vamm hag a vefe ur vaouez divatoc'h egedon hag a rofe, dre zrougiezh, taolioù dorn d'am bugale : da re int ivez. Na ra ket an dra-se dreist-holl, me az ped. Rak enebourez bugel ar gentañ mamm eo ar vammeg pa zegouezh, ha n'eo kuñvoc'h tamm ebet eget un naer-wiber. Ur paotr a gav un harp start digant e dad. Te avat, va mero'hig kaezh, penaos e ri evit bevañ a-zoare da vuhez a werc'hez ? Gant peseurt maouez e tegouezhi pa vo bet euredet da dad ? Aon em eus na

skignfe hounnezh brudoù fall diwar da benn ken e vo diaes dit kavout ur pried da c'houde. Rak da vamm n'az roio biken e dimeziñ ha n'az kalonekaio ket pa vezi o willoudiñ, va merc'h, en ur chom ez kichenik d'ar mare ma ne vez hini c'hwekoc'h da welout d'ur vaouez eget he mamm. Rak ret eo din mervel, ha n'eo ket warc'hoazh na goude warc'hoazh e teu ar gwallzarvoud hogen diouzhtu e vin anvet e-touez ar re n'eus ket mui anezho. Kenavo. Ha te, va fried, a c'hell fogasiñ da vezañ kemeret ar wreg wellañ-holl, ha c'hwi, bugale, da vezañ degouezhet gant ar wellañ mamm.

AR C'HORVLENIER

Bez dinec'h, rak ne zoujan ket komz e-lec'h hennezh. Kement-se a raio ma n'en deus ket kollet e skiant-vat.

ADMETOS

Ya, kement-se a vezo graet, n'en em chal ket. Peogwir e oas va gwreg din o vezañ bev, ha te aet da ene, va gwreg nemeti e vi anvet ha maouez ebet e Tesalia na zisklerio bezañ va fried ez lec'h. N'eus gwreg ebet par dit, dezhi tad ken uhelouenn hag hevelep kened. A-walc'h a vugale am eus; bezañ evurus ouzh o mirout ne c'houlenan ken em pedennoù digant an doueed peogwir n'em eus ket an eurvad d'az mirout. Gouelañ kañv dit, n'eo ket e-doug bloaz e rin, hogen keit ha ma pado ar vuhez ennon, o kasaat va mamm, o villigañ va zad : gant o zeod, n'eo ket e gwirionez em c'harent. Te an hini eo a saveteas va buhez en ur reiñ en eskemm ar pezh tostañ d'az kalon. Daoust ha n'em eus ket abeg da hirvoudiñ o koll ur bried seurt maz out ? Paouez a rin a evañ er banveziou, a hentiñ an dud, dilezel a rin ar garlanteziou hag ar c'hanacuennoù ma oa leun va zi ganto. Ha biken mui ne c'hellin stekiñ ouzh al lura, na degemer ar soñj da ganañ ouzh ar fleüt libian. Ganit e kasi dudi va buhez : da gorf skultet gant dorn ampart arzourion a vo astennet e-barzh va gwele. En e gichen en em

lakain, hag ouzh e stardañ gant va divrec'h e tistagin da anv : kavout a raio din derc'hel a-dro-vriat va gwreg karet daoust ma ne rin ket e gwirionez. Yen e vo, gouzout a ouzon, an dudi-mañ, hogen e-giz-se e c'hellin diboaniañ va c'halon evelato. Dre va huñvreoù e teui d'am lacuenaat : c'hwek eo merzout ar re garet dre ar c'housk en noz, e n'eus forzh pe zoare e ve. Ha ma vefe din teod ha sonerezh Orfeus ken e c'hallfen da dennañ a-dre krabanoù Hades en ur voemañ gant va c'hanennoù merc'h Demeter ha pried hounnezh, e tiskennafen, ha na ki Plouton, nag ar c'hoziad blenier-eneoù gant e roeñv, ne virfent ouzhin d'az tegas e buhez d'ar gouloù. Hogen, petra bennak e ve, gortoz-me du-hont ken na varvin ha prient an ti a vezo hor c'hen-anez. Gourc'hemenn a rin d'am bugale va lakaat en hevelep keler ganit ha da astenn va c'hostezioù astok ouzh da re. Rak, ha me marv ne fell ket din bezañ dirannet biken diouzhit : te hepken a voe feal din.

AR C'HORVLENIER (ouzh Admetos)

Ha me ivez a gendougo ganit, evel ur mignon evit e vignon, kañv glac'harus hounnezh. Rak dellezek eo.

ALKESTIS

Bugale, selaouet hoc'h eus ho tad : lavaret en deus ne zimezfe biken da lakaat ur vaouez all warnoc'h ha n'am ankounac'hafe biken.

ADMETOS

Ha bremañ c'hoazh henn lavaran hag henn ober a rin.

ALKESTIS

Hervez an divizoù-mañ degemer dre va dorn va bugale.

ADMETOS

O degemer a ran, donezon karet digant un dorn karet.

ALKESTIS

Bez ur vamm evito avat, kemer va lec'h.

ADMETOS

Ret mat eo din peogwir o deus da gollet.

ALKESTIS

Â vugale ! Pa ranken bevañ setu ma tiskennan d'an Traoù !

ADMETOS

Siwazh ! Fenaos e rin pa ri diouer din ?

ALKESTIS

Sederaat a ri gant an amzer : neb a zo marv n'eo netra.

ADMETOS

Va c'has ganit en anv an doueed, va c'has ganit d'an Traoù !

ALKESTIS

A-walc'h eo din mervel ez lec'h.

ADMETOS

A Aotrou ! Pebezh pried a lamed diganin.

ALKESTIS

Setu ma teu va daoulagad pounner a deñvalded.

ADMETOS

Echu eo ganin m'am dilezezh, macuez.

ALKESTIS

Ned on mui netra, koulz lavaret.

ADMETOS

Distou da benn, na zilez ket da vugale.

ALKESTIS

Anat eo n'eo ket a galon vat e ran. Kenavo, bugale.

ADMETOS

Sell outo, sell.

ALKESTIS

N'eus mui ac'hanon.

ADMETOS

Petra a rez ? Hon dilezezh ?

ALKESTIS

Kenavo !

ADMETOS

Marv on, reuzeudig ac'hanon !

AR C'HORVLENIER

Tremenet eo : n'eus ket mui gwreg Admetos.

PAOUEZADENN

C'HOARIGAN

BUMBLOS

Siwazh din ! Pebezh tonkadur eo va hini ! Aet eo Mamm d'an Traoù, n'emañ mui, o Tad, dindan an heol. Va dilezet he deus ha graet ac'hanon un emsivad diseur er vuhez. Gwel he malvenn, hag he daouarn aet pep nerzh diouto.

(Oc'h en em deurel war gorf Alkestis :)

Selaou ac'hanon, selaou, â Mamm, me eo az ped, Mamm, me da labousig stag ouzh da veg.

ADMETOS

An hini a c'halvez ne glev ket ha ne wel ket ken ez omp skoet me ha c'hwi gant ur gwalleur pounner.

BUMBLOS

Ez yaouank c'hoazh, Tad, ez on-me dilezet va-unan da verdeiñ war vor ar vuhez goude koll va mamm garet. Un darvoud mantrus am eus-me gouzañvet e gwirionez. Ha te a zo skoet war un dro ganin, va c'hoar. O Tad, en aner, en aner e timezjout peogwir n'eo'h eus ket baleet a-unan ganti betek an diwezh, betek ar gozhni. War-lerc'h da gimiad, Mamm, eo kouezhet en e boull an tiegezh.

AR C'HORVLENIER

Admetos, ret eo gouzañv ar gwalleur-mañ. N'out ket an hini kentañ nag an hini diwezhañ da vezañ dispartiet diouzh

ur vacuez a galon. Soñj ervat ez eo tonket deomp-ni holl mervel.

ADMETOS

Gouzout a ouzon; ha n'eo ket hep gouzout din he deus plavet ar walenn-mañ warnon. Dre ma ouien kement-se avat e tizerien a-bell-zo. Hogen mont a ran da aozañ an ambrougaded-kañv; va skoazellit ha ken-eilganit a bep eil ar Pean da zoue didruezus an Traoù. Da holl Desaliz a zo dindan va beli e roan urzh da gemer perzh e kañv va gwreg varv o touzañ o blev hag o wiskañ ur sae du. Ha c'hwi hag a stergn ar c'hirri pederrodek hag ar javed di-eil, troc'hit moue o gouzoug gant an houarn. Hag arabat eo e ve klevet son ar fleütoù e kêr nag hini al lura libian ken na vo tremenet daouzek loarvezh leun. Biken ne rin obidoù ur marviad all karetoc'h eget hennezh na bet gwelloc'h em c'heñver. Dleet eo din hec'h enoriñ peogwir n'eus nemeti hag a gredas mervel em lec'h.

(Ar vevelion a zegas en-dro er palez korf Alkestis. Admetos a ya war o lerc'h.)

AR C'HOR

Â verc'h Pelias ! Evurus ra c'helli mont da chom e-barzh tiez Hades, manva diheol. Gouezet Hades, doue e vlev du, gouezet ar c'hozhiañ ivez, blenier an Anaon, azezet ouzh ar roeñv hag ar baol, ez eo ar wellañ eus ar maouezed, hag a bell, en devo dezouget en tu all da lenn an Ac'heron, war ar vag divroesñvek. Lies gwech ez kanmeulo bangor ar Mousenned gant skant seizhkordennek baot ar menezioù ha da vrudañ a reor e-barzh lid-kanoù di-lura, e Sparta, kerkoulz hag en Aten skedus ha gladus pa zeuio en-dro miz Mezheven gant red ar c'houlzoù-amzer tra ma plav al loar a-hed an noz en oabl : ken brav eo testenn ar c'hanoù ac'h eus lezet d'ar

varzhed.

Gant ma vefe tu din, gant ma c'hallfen da gas d'ar gouloù, pell diouzh annez Hades ha tonnoù ar C'hokutos en ur roeñviañ war stêr an Ifern. Rak an hini nemeti out, maouez hep he far, hag he deus kredet reiñ he buhez en eskemm evit tennañ he fried a-dre skilfoù Hades. Skañv ra gouezho an douar warnout, maouez. Ma timezfe en-dro da bried e teufe da vezañ heugus ken din ken d'az pugale.

Ha pa nac'he ar vamm e kuzhfed he c'horf dindan an douar ha pa nac'he ivez an tad deut war an oad, (an hini a c'hanjont ne gredent ket difenn evito da gaout blev gwenn, tud kriz ma oant), te eo, e-kreiz da yaouankiz flamm, hag a guita ar gouloù en ur vervel evitañ. Ra c'hoarvezo ganin bezañ unanet gant ken karantezus ur wreg. Rak er vuhez-mañ eo dibaot seurt eurvad roet da lod. Neuze e vefe dic'hlac'har hor c'hen-vuhez a-hed an deizioù o tremen e-biou.

HERAKLES

Estrenion, c'hwi hag a chom e-barzh rangêrioù Feres, daoust hag Admetos a c'hellin kavout er gêr ?

AR C'HORVLENIER

Emañ er gêr mab Feres, Herakles. Hogen lavar deomp perak out deut war zouar Tesaliz hag eo'h eus kerzhet betek kêr Feres.

HERAKLES

Evit Euristeus a Durintos em eus un trevell da seveniñ.

AR C'HORVLENIER

Ha da belec'h emaut o vont ? En abeg da betra e rankez kantren ?

HERAKLES

Da gerc'hat stern pevarjav an Trakiad Diomedes an hini eo.

AR C'HORVLENIER

Penaos e c'helli ? Daoust ha n'eo ket dianav dit an estrenvro ?

HERAKLES

Dianav eo : biskoazh n'on aet war zouar Pisoniz.

AR C'HORVLENIER

N'out ket evit mestroniañ ar c'hezeg hep emgann.

HERAKLES

Hogen n'eus ket tu din kennebeut dinac'hañ seveniñ va zrevelloù.

AR C'HORVLENIER

O lazhañ a ri kent distreiñ pe, marv, du-se e chomi.

HERAKLES

Ne vo ket hennezh va emgann diwezhañ.

AR C'HORVLENIER

Peseurt gounid ouzhpenn az pefe o trec'hiñ war ar mestr ?

HERAKLES

E javed a zegasin en-dro da roue Turintos.

AR C'HORVLENIER

N'eo ket aes lakaat ar wesken en o genou.

HERAKLES

Eo, ma ne c'hwezhont ket tan dre o fronelloù.

AR C'HORVLENIER

Hogen placouiañ a reont an dud gant o javedoù herr.

HERAKLES

Doare al loened gouez d'en em vagañ eo an hini a lavarez, n'eo ket hini kezeg.

AR C'HORVLENIER

O c'hrevier a c'helli gwelout kousiet gant ar gwad.

HERAKLES

Ha mab da be dad e fougas da vezañ ar mager anezho ?

AR C'HORVLENIER

Mab da Areas, aotrou Trakia e skoedig acour.

HERAKLES

Setu c'hoazh ul labour all tonket din, an hini a venegez. Kalet, e gwirionez, ha serzh eo hent va zonkadur peogwir e rankin en em gannañ ouzh mibion Areas : da gentañ em eus graet ouzh Lukaon, da c'houde ouzh Kuknos, ha sed m'emaon o vont da stourm en un trede emgann ouzh ar javed hag o mestr. Hogen n'eus den hag a welo ganiad Alkmene o krenañ dirak brec'h un enebour.

(Admetos, touzet e benn ha gwisket e du, a zeu er-maez eus ar palez; war e lerc'h e tegouezh mevelion.)

AR C'HORVLENIER

Hama ! hemañ eo dres arc'hvestr ar vro : Admetos. Emañ o tont er-maez eus e di-meur.

ADMETOS

Demat, â vab Zeus, ganet eus gwad Perseus !

HERAKLES

Ha dit ivez kevarc'h, brenin Tesaliz, bez evurus !

ADMETOS

A-walc'h e fellfe din. Gouzout a ran ez out tuet mat din.

HERAKLES

Perak ec'h eus blev touzet kañvarouezius ?

ADMETOS

Douarañ unan bennak marv a rankan ober feteiz.

HERAKLES

Ra gaso an doue ar gwalleur diwar-dro da vugale !

ADMETOS

Emañ bev er gêr ar vugale an eus-me ganet.

HERAKLES

Poent eo d'az tad mont kuit, lakaet ez eo eñ an hini a zo aet kuit.

ADMETOS

Bev eo va zad, ha va mamm ivez, Herakles.

HERAKLES

Da wreg Alkestis n'eo ket marv evelato ?

ADMETOS

Div gomz a c'hellan distagañ diwar he fenn.

HERAKLES

Daoust hag ec'h eus lavaret e oa marv, pe daoust ha bev eo c'hoazh ?

ADMETOS

Bev eo c'hoazh ha n'eo ket mui bev; va glac'hariñ a ra avat.

HERAKLES

Netra muioc'h eget kent ne ouzon. Disklaer eo da gomzoù.

ADMETOS

N'anavezet ket an tonkadur a rank-hi gouzañv ?

HERAKLES

Eo, ar gwir he deus bet d'en em ginnig evidout.

ADMETOS

Penaos e vev c'hoazh eta m'he deus asantet da gement-se ?

HERAKLES

A ! na leñv ket d'az pried en a-rack : gortoz ma vo poent.

ADMETOS

Marv eo neb a rank mervel ha n'eus ket mui eus an hini a zo marv.

HERAKLES

Traoù diforc'h eo bezañ ha chom hep bezañ, da soñj darn vuiañ an dud.

ADMETOS

Da soñj eo, Herakles; ur soñj all am eus-me avat.

HERAKLES

Perak e leñvez eta ? Pehini eus da vignoned a zo marv ?

ADMETOS

Ur vaouez eo; eus ar vaouez-se e komzemp bremaik.

HERAKLES

Un estrañjurez eo pe daoust ha kar eo dit dre he ganedigezh ?

ADMETOS

Un estrenez eo ha diouzh un tu all eo tost-tre d'an tiegezh.

HERAKLES

Penaos eta, e-barzh da di-te, he deus kollet ar vuhez ?

ADMETOS

A-c'houde marv he zad e raed amañ war-dro an emzivadez.

HERAKLES

Siwazh ! Gant m'em bije da gavet, Admetos, di-enkrez.

ADMETOS

Gant peseurt soñj e wriez ar c'homzoù kuzh-mañ ?

HERAKLES (o skeiñ war-du an nor)

Emaon o vont etrezek oaled estrenion all.

ADMETOS (ouzh e herzel gant ur jestr)

N'hell ket bezañ : arabat eo e c'hoarvezfe hevelep gwalleur ganin.

HERAKLES

D'ar re zoaniet eo kasañ an diavaeziad pa zeu.

ADMETOS

Marv eo ar re varv : deus tre 'ta !

HERAKLES

Mezh eo festañ e-tal mignoned o leñvañ.

ADMETOS

Distag eo kambroù an ostizidi : eno e vi lojet.

HERAKLES

Laosk me ha dit e lavar in mil trugarez.

ADMETOS

Ne o'hell ket bezañ ez afes da oaled un den all.  
(O komz ouzh ur mevel) Elegn hemañ, dibrenn evitañ kambrou  
distag an ostizidi, en distro diouzh an ti; ha d'ar re a  
zo kefridiet d'hemober, lavar degas boued a-fonn. (D'ar  
sklaved all e-keit m'emañ Herakles o vont kuit) Alc'houezit  
war un dro an nor o skeiñ war ar porzh diabarzh. Ne zere  
ket ouzh ostizidi o festañ klevout keinvanoù na bezañ doaniet.

AR C'HORVLENIER

Petra emacout oc'h ober ? P'emañ degouezhet seurt gwall-  
zarvoud, Admetos, e kredez reiñ degemer da estrenion ?  
Perak out ken diboell ?

ADMETOS

Hogen m'em bije argaset diouzh va zi ha diouzh va o'hêr  
an ostiziad a oa deut, daoust ha muio'h ez piye va meulet  
evit-se ? N'ez piye ket graet, sur, rak ne vije ket dister-  
oc'h va gwalleur, ha ne vijen ket bet herberc'hus tamm ebet.  
Dreist d'an drougeurioù all e vije bet taolet warnon an  
drougeur-mañ : brudet e vije bet va zi evit bezañ dizegemerus  
d'an ostizidi. A-hend-all, me va-unan a gav digantañ ar  
gwellañ degemer bewech ma teuan war zouar krin Argos.

AR C'HORVLENIER

Perak avat ec'h eus kuzhet outañ gwall-blanedenn an  
deiz-mañ peogwir eo deut e-giz ur c'heneil, hervez a lavar  
e-unan ?

ADMETOS

Nepred n'en defe asantet da vont-tre em zi m'en defe  
klevet kel eus va drouklammoù. Heñ-mañ-heñ, gouzout a ouzon,  
a gavo ez on diboell oc'h ober pezh a ran ha va diveuliñ a

raio. Ne oar ket va zoenn avat nag argas na dismegañsiñ an  
ostizidi.

(Admetos a ya tre en-dro er palez)

AR C'HOR

Foz I

O to herberc'hus da lies den perc'henn m'emañ warnout  
unan largantezus ! Chom ennout a deurveas doue Puto, Apollon,  
e luraoù heson. Gouzañv a reas bezañ mesaer e-barzh da zom-  
anioù o c'hwitellat evit da chatal, war bantenoù diserzh  
an torgennoù, tonioù orgedus gant e fleit.

Enep-poz I

A-gevret ganto e peure, boemet gant da sonioù, al  
linsed marellet. Dont a rae, goude dilezel flagenn Otruos,  
bagad gell al leoned. Ha koroll a rae, ouzh son ar c'hitara,  
Foebos ! an heizez vrizhellek o kerzhout gant un troad  
skañv en tu all d'ar sapt o blev uhel, plijet gant da ganenn  
hevoudus.

Foz II

Rak-se ez eo perc'henn da galz tropelloù da diegezh  
a zo en e sav war ribl al lenn Foebos e zoureier kaer e-lec'h  
emañ o chom. Da aradurioù e barkoù ha da ec'honderioù e  
gompezennoù e ro da harzoù, war-dro ehan teñval mirc'hed an  
heol, oabl Molossia. Emañ o c'hourc'hemenn war mor Enezek  
betek ribl di-havr ar Pelios.

Enep-poz II

Ha bremañ adarre en deus digoret frank e di hag en  
deus degemeret an estrañjour, dour en e saoulagajo leñvañ  
war gorf e bried karet marvet en e di tuchantik. Rak an  
den a galon a chom feal d'an enor daoust da bep tra. Gant  
un den reizh e vez graet pep tra ez fur; estlammañ a ran

hag em ene eo start ar spi ez adkavo ar bediad deol an eurvad.

(Admetos a zeu er-maez eus ar palez, war e lorc'h sklaved o tougen ar gwele m'emañ astennet warnañ Alkestis. Dont a ra, da heul an ambrougadeg, mevelion ha mitizhion e kañv, ganto kinnigadoù a lorc'h evit an hini varv.)

ADMETOS

Tudoù Feres, dre gengarantez oc'h deut amañ. Emañ endeo ar c'hoskor o tibradañ war o diskoaz ar c'horf graet dezhañ an holl enorioù dleet evit e zougen betek ar paou. Deoc'h avat da saludiñ evel maz eo dleet ober an hini varv o vont kuit en he diwezhañ beaj.

(Ferez kozh a zeu tre dre an tu dehou. Krommet eo gant an oad ha bale a ra a gammedoù bihan. A-dreñv dezhañ mevelion o tougen bragerizoù a gañv.)

AR C'HORVLENIER

Setu avat ma welan da dad o tont war-bouez e gammed kozhiad hag ivez eilerion o tougen kinkladurioù evit da bried en o daouarn, bragerizoù ar re varv.

FERES

Emaon deut dre ma kemeren perzh ez poan, va mab. Rak (den n'am dislavaro) reizh ha fur e oa ar vaouez oc'h eus kollet. Hogen dav eo gouzavf seurt gwalleurioù pegen diaes bennak e vent. Degemer ivez ar c'hinkladurioù-mañ a roan dezhi da vont dindan an douar. Enoriñ he c'horf a zleer rak marvet eo evit saveteiñ da vuhez, va mab; bugale he deus roet din hag a-drugarez dezhi ivez ne ranken ket da goll na dizeriañ e-pad ur gozhni gañvleun. Lakaet he deus avat da greskiñ bri ar merc'hed oc'h asantiñ d'ur marv ken hael. (Astenn a ra e vrec'h war-du ar varvskañv.) A ! dit-te hag a saveteas hemañ hag hon adsavas pa oamp o vont da gouezhañ, kevarc'h, hag e tiez Hades r'en em gavi mat. Diskleriañ a

ran ez eo talvoudus da vediz skoulmañ seurt dimezioù; a-hend-all, dimeziñ ne dalv ket ar boan.

ADMETOS (o vale strezek e dad, kounnaret rus)

Perak out deut d'an obidoù-mañ ? Da zec'hervel n'em eus ket graet ha n'out ket ur c'hensil evidon amañ. Da vragerizoù ne zougo-hi biken : rak n'he deus ket ezhomm a netra evit bezañ beziet. Kenglac'hariñ ganin a zlees pa oan-me o vont da dremen. Hogen chomet out en distro neuze, laosket ec'h eus ha te ur c'hozhiañ, unan all e-kreiz e yaouankiz da vervel. Ha goude-se e teuez da leñvañ war ar c'helan-mañ ? Daoust ha ne oas ket e gwirionez tad va c'horf hag an hini a lavar eo va mamm hag a anver va mamm n'he deus ket va ganet ? Diouzh gwad ur sklav e tennan va buhez ha silet on bet dre guzh e-barzh kof da wreg ? Diskouezet ec'h eus diwar arnod petore den out ha na gredan ket ez on mab dit. E gwir, dre al laoskoni eo ez out trec'h d'ar re all. Deut war an oad ha degouezhet e penn ar vuhez evel maz out n'ec'h eus ket mennet na kredet mervel evit da vab; hogen lezet hoc'h eus houmañ d'henn ober, hag hi un estrañjourez, ma c'hellin ez reizh ober anezhi va zad ha va mamm. Fadal e oa kaer an emgann az piñ savet en ur vervel evit da vab, ha berr, forsh penaos, e oa an amzer a chome dit da vevañ, ha bev e vefen-me, hounnezh a vije ivez ha ne hirvoudfen ket d'am gwalleurioù. Koulskoude, kement tra ret d'un den da vout eürus a zo degouezhet ganit : pa oas yaouank flamm e piaoues ur vali di-hars, ur mab az poa, me, da vezañ war da lorc'h mestr ar palez-mañ; n'oa ket ret dit dilezel un ti goullo da breizañ da estrenion goude bezañ marvet hep bugel. Ne lavari ket evelato ec'h eus va deoet d'ar marv e-skeud ma n'em eus ket doujet da gozhni ? Hag evit kement-se setu an anaoudegezh-vat a baet din, te ha va mamm. Hama ! na goll ket amzer ken evit engehenta bugale az mago

e-keit ma vi kozh, az sebelio hag az lakay e gwel pa vi marv : rak n'eo ket me, a c'hallez krediñ, az pezio gant va daouarn : marv e vijen ma ne vije bet va buhez nemet diouzhit. Ma welan bannoù an heol e ran a-drugarez d'ur saveteer all hag eus hennezh e tisklerian bezañ ar mab ha mager karantezus e gozh-ni. Dre c'haou e het mervel ar re gozh, safiset, o klemm diwar-benn o oad hag hirder ar vuhez : p'emañ deut tost ar marv ne fell mui da hini anezho mervel, hag ar gozhni n'eo ket mui ur samm dezho.

AR C'HORVLENIER

Admetos, bras a-walc'h eo gwalleur an deiz-mañ : diwall da lakaat da dad da daeriñ.

FERES

Â vab ! Ouzh piv e soñj dit emacout o komz ? O hegal ouzh ul Iudiad pe ur Frugiad gopret gant da arc'hant emacout ? Ne ouzout ket ez on Tesaliad, mab un Tesaliad ha ganet dieub ? Broueziñ re a rez, ha ned i ket kuit evel-se goude bezañ va gloazet o vannañ ouzhin komzoù dichek un den yaouank. Me an hini eo en deus da c'hanet hag en deus da vaget evit bezañ mestr war an ti-mañ : ne zlean ket avat mervel ez lec'h. Digant va zadoù n'em eus ket degemeret seurt lezenn e varve an tadoù evit o bugale, ha n'eus bet biskoazh hevelep lezenn e Bro-C'hres. Rak evidout-te da-unan ez out ganet, pe chañsus pe dichenñsus e ve da blanedenn. Da galz tud e c'hourc'hemennez ha kalz a zouar a lezin dit : digant va zad em eus bet kemend-all. Na varv ket evidon, hogen ne rin-me ket evidout. Bourrañ a rez o welout ar gouloù : krediñ a rez ne vourr ket da dad ouzh henn ober ? A-dra-sur e veizan ez eo hir an amzer da dremen en Traoù, berr, e gin, hini ar vuhez-mañ, hogen hounnezh zo c'hwek evelato. Ha te da-unan a-hend-all, hep mezh ebet,

ac'h eus gwall-stourmet da chom hep mervel : ya, bevañ a rez, aet out diouzh an tonkadur dleet, lazhet eo'h eus da wreg avat. Ha bremañ e komzez eus va laoskentez goude bezañ bet trec'het gant ur vaouez, den lor, ya, gant ur vaouez a zo marvet evit ar paotrig brav maz out. Dispar eo an tu ac'h eus kavet da chom hep mervel biken ma kendreo'hez kement gwreg a vo dit d'ur mare da dremen ez lec'h. Ha kunujañ a rez ar re a zo kar dit ma ne vennont ket ober kemend-all ha te un den digalon da-unan. Ro peoc'h. Kred start - ma karez da vuhez-te - e kar an holl gwitibunan o hini. Ha ma klevan kunujenoù, kalz a gunujenoù all a glevi-te ivez, ha ne vo ket e gaou.

AR C'HORVLENIER

Re a gunujenoù a zo bet dislonket endeo; paouez, kozhiad, a zirollañ ouzh da vab.

ADMETOS

Komz kentoc'h ma respontin dit; ma ne blij ket dit klevout ar wirionez eo arabat ober gaou ouzhin.

FERES

Ma vijen marvet evidout em bije graet maoc'h gaou ouzhit.

ADMETOS

Heñvel dra eo eta d'un den yaouank ha d'un dan kozh mervel ?

FERES

Ur vuhez hepken a zleomp bevañ ha n'eo ket div.

ADMETOS

Hiroc'h amzer eget Zeus ra c'helli bevañ eta.

FERES

Malloziñ a rez da gerent n'eo'h eus gouzañvet gwall ebet drezo.

ADMETOS

Dre m'em eus merzet e karez ur vuhez hir e ran.

(D'ar mare-se e teu tre an ambrougadedg-kañv.)

FERES

Dacust avat ha n'emaout ket o touarañ ar c'horf-mary-  
mañ e-lec'h da hini ?

ADMETOS

Setu pezh a ziskouez da laoskentez, hailhon !

FERES

Evelato n'eo ket en abeg din eo marv : ne lavari ket  
ar c'hontrol.

ADMETOS

A ! gant ma teui da gaout ezhomm ac'honan un deiz !

FERES

Gra al lez da galz a verc'hed evit ma varvo e-leizh  
anezho.

ADMETOS

Dit eo ar vezh-se rak nac'hañ a rnes mervel.

FERES

Tost d'am c'halon eo ar gouloù-mañ roet gant un doue,  
tost.

ADMETOS

N'eo'h eus ket gwad dindan da ivinoù, n'out ket ur gour.

FERES

Evelato n'emaout ket o c'hoarzhin en ur gas d'ar bez  
korf un den kozh.

ADMETOS

Mervel a ri koulskoude hag e ri hep brud ebet.

FERES

N'on ket nec'het gant ar gwall-vrud peogwir e vin marv.

ADMETOS

A ! A ! Na divergont eo ar re gozh !

FERES (o tiskouez korf Alkestis)

Houmañ n'eo ket divergont e oa, hogen diskiant eo bet  
evidout.

ADMETOS (ouzh e gas kuit gant ur jestr)

Alo ! Skarzh ac'han ! Laosk-me da zouarañ ar c'horf-mañ.

FERES

Mont a ran kuit. He douarañ a ri, te, he muntrer. Klask  
a raio trouz ouzhit avat ar re a zo kar dit dre'z timesi :  
e gwirionez n'eo ket mui Akastos un den ma ne dalvez ket dit  
gwad e c'hoar.

ADMETOS

Kerzh d'ar groug ha ra gerzho a-unan ganit an hini a  
zeuas da ober hec'h annez ez ti. Divab, ha bev ho mab, dalc'hit  
da goshaat. Ne lakaot ket mui ho treid dindan an hevelep toenn  
ha me. Ha ma c'hallfen reneañ ti va zadoù dre vouezh bannerion  
e rafen. Ni avat (peogwir e rankomp gouzañv ar reuz a-vremañ),  
deomp kuit da gas ar c'horf war ar paou.

(Pellaat a ra an holl)

AR C'HORVLENIER

Siwazh ! Siwazh ! Â blac'h reuzeudik dre'z kalonegezh,  
â vacuez hael ha dispar ! Kenavo ! Madelezhus ra vo dit  
degemer Hermes isdouarel hag Hades. Maz eus ur gopr bennak  
d'ar re vat du-hont, beset roet dit da lod, ha ra azezi e-tal  
gwreg Hades.

(Chom a ra goull ar c'hoarilec'h. A-greiz-holl e teu er-maez  
eus ar palez dre un nor a-gostez ar sklav en deus derenet  
Herakles).

AR MEVEL

Kalz a ostizidi a lies bro a zo deut, gouzout a ran, da

di Admetos, hag o servijet am eus ouzh taol. Biskoazh avat n'em eus resevet hini gwashoc'h eget hemañ. Da gentañ e wele mat-tre e oa e kaff va mestr. Deut eo tre evelato, kredet en deus mont dreist treuzoù an nor. Da c'houde n'en deus ket graet ez fur gant an degemer a roed dezhañ dre zegouezh : gouezet en doa hor gwalleur hogen daoust da se e oa groñs e c'houlennoù. Hag o kemer en e zaouarn un hanaf goloet a iliav e ev al likor digemmesk e vamm zu, ar vlokad, ken eo tommet d'e benn gant flamm ar gwin en deus e c'hronnet. Hag o c'harlantezañ e vlev gant barroù meurta e laosk youc'had-ennoù diheson. Daou seurt ton a oa da glevout eta : hemañ a gane a-bouez-penn hep teurel pled ebet ouzh droukverzhioù Admetos; ni avat ar servijerion a leñve d'hor mestrez. Ha ne ziskouezemp ket hon daoulagad leun a zaeroù d'an ostiziad rak difennet e oa gant Admetos. Ha bremañ e pourvezan e-barzh an ti-mañ chervad d'un estrañjour, un hailhon bennak, laer ha ribler. Hounnezh avat he deus kuitaet an ti ha n'on ket aet d'he heul, ha n'em eus ket astennet va brec'h d'he saludiñ: hi va mestrez ma hirvoudan dezhi hag a oa evidon hag evit an holl servijerion ur wir vamm. Pellaat a rae diouzhimp kalz a zrouklammoù o sioulaat brouezennoù he gwaz. Daoust ha n'em eus ket ar gwir da gasaat an ostiziad-mañ erru e-kreiz hor gwalleurioù ?

(Dont a ra Herakles er-maez eus ar palez gant ur garlantez meurta war e benn hag ur c'hib en e zorn)

HERAKLES

Oc'ho ! An den ! Perak e arvestez ouzh an dud gant ur sell teñval hag un tal krizet ? Arabat eo d'ur mevel gwall-zegemer an ostizidi ha mouzhañ outo, hogen er c'hontrol e tle reiñ bod dezho a galon laouen. Setu ma welez ur mignon

d'az mestr er gêr : en em neo'hiñ a rez da vat gant ar c'hañv d'un estrenez ha resev a rez anezhañ gant un aer neo'het ha tagnous. Deus amañ ma teskin dit bezañ furoc'h. Gouzout a rez petra eo stad ar re varvel ? Ne rez ket, sur a-walc'h. Penaos e oufes e gwirionez ? Va selaou avat : holl vediz gwitibunan a rank mervel hag e-touez ar re varvel n'eus nikun a vefe evit gouzout ha bev e vo antronoz. N'eo ket splann da belec'h e tisoc'ho an Tonkadur o vale. N'heller ket deskiñ an dra-se ha n'eus ket tu d'ar skiant da gacut krog ennañ. Klevet eo'h eus, desket eo'h eus va c'hentel ? Hama ! Kemer plijadur bremañ, ev, kont pep deiz eus ar vuhez evel un dra hag a zo dit, hag ar peurrest evel un dra hag a zo d'an Tonkadur. Kehel Kupris, an douez karadekañ ouzh bediz, hag a-bell, rak madelezhus eo an douez-se. Laosk a-gostez kement preder all a zo ha kred ar pezh a lavaran dit n'o deus va c'homzoù doare da vezañ skiantek, pezh a gav din. Pa'z po dioueret ar re-c'hlaoc'har-mañ e evi ganeomp en ur ober fae war pezh a zo tonket, ha garlantezañ a ri da benn gant bleunioù. Sur on e tizeorio lusk ar c'hib o sevel hag o tiskenn da dro-spered ginet hag hurennek. Peogwir ez omp marvel e tleomp kaout soñjoù re varvel. E-keñver an holl dud parfet ha mousklenek gwitibunan, ma reer diouzh va meno-me, n'eo ket o buhez ur vuhez, un ifern ne lavaran ket.

AR MEVEL

Gouzout a ouzomp kement-se. D'ar mare-mañ avat n'emaomp ket en ur stad a rofe deomp tro da festañ ha da c'hoarzhin.

HERAKLES

Un estrenez eo an hini varv. Emañ bev nistri an ti-mañ.

AR MEVEL

Penaos bev ? N'anavezez ket ar gwall-zarvoud a zo c'hoarvezet en ti ?

HERAKLES

Anez en dije da vestr livet gevier din.

AR MEVEL

Hemañ a zo re herberc'hus, re herberc'hus.

HERAKLES

Arabat e vefe din bezañ laouen en abeg d'un estrenez varv ?

AR MEVEL

A-dra-wir, re eo e oa eus an tiegezh.

HERAKLES

N'en defe ket displeget eta un droukverzh bennak ?

AR MEVEL

Bez laouen : n'eus nemedomp d'en em chalañ evit droug-  
euriou ar vistri.

HERAKLES

N'eo ket evel-se e kroger da zivizout pa zouger kañv  
d'un estrañjour.

AR MEVEL

A-hend-all n'em befe ket broc'het ouzh da welout o festañ.

HERAKLES

Daoust ha dismegañset on bet gant va ostizion avat ?

AR MEVEL

N'out ket deut e koulz da glask degemer.

HERAKLES

Daoust hag aet kuit eo unan eus ar vugale pe an tad-kozh ?

AR MEVEL

Gwreg Admetos an hini a zo marv, estrañjour.

HERAKLES

Petra a lavarez ? Ha neuze e roec'h herberc'h din evel-  
se ?

AR MEVEL

Mezh en doa ouzh da gas kuit diouzh an ti.

HERAKLES

Â reuzeudig ! Pebezh eilez ac'h eus kollet !

AR MEVEL

Marv eo an holl ac'hanomp ha n'eo ket hi hepken.

HERAKLES

Henn drouksantet am boa koulskoude o welout e zaoulagad  
dourek, e benn touzet hag e zremm. Hogen va lakaat a rae da  
grediñ edo o vont da gas betek ar bez ambrougaded-kañv un  
estren. En desped din eo ez on aet dreist d'an treuzoù hag  
e even e-barzh ti un den herberc'hus pa oa skoet gant ur seurt  
droukverzh. Ha bremañ emañ o festañ garlantezet va fenn !

(Stlepel a ra e hanaf d'an douar ha lemel a ra e c'harlantez.  
O komz ouzh ar mevel :)

D'az kwall eo avat : n'ec'h eus lavaret netra pa oa ar  
gwalleur-se en ti. E pelec'h emañ ouzh he sebeliañ ? Da belec'h  
e rankan mont d'he c'havout ?

AR MEVEL

A-hed an hent eeun a gas da Larisa : spurmantañ a ri ur  
bez e maen lufr kerkent ha deut er-maez eus ar rak-kêr.

HERAKLES

Â va c'halon gouzañvet ganti lies poan, ha va brec'h !  
Diskouezit peseurt mab he deus ganet da Zeus an Duruntiaez  
Alkmene, merc'h Elektruon. Dav eo din saveteiñ ar vaouez a zo  
marvet bremañ ha degas Alkestis en-dro d'ar gêr : prouiñ a  
rin evel-se va grad-vat da Admetos. Mont a rin da spiañ brezin  
teñval-wisket ar re varv, Ankou, ha soñjal a ra din en e gavin  
oc'h evañ e-tal ar bez gwad an aberzhioù. Pa'm bo sailhet warn-  
añ er-maez eus va ged-lec'h, kroget ennañ hag e stardet a-dro-  
vriad gant va daouarn, ne vo den d'e ziframañ diganin bronduet  
e gostezioù ken n'en devo laosket ar vaouez da vont.

Ma c'hwitan gant an taol-mañ ha ma ne zeu-efñ ket da gichen ar wastell wadek ez in da gavout Re-an-Traoñ hag an Aotrou Hades en o ziez di-heol, hag he goulenn a rin. Sur on neuze da zegas Alkestis en-dro d'an Nec'h, ma c'hellin he reiñ etre daouarn un ostiz am degemeras en e di ha n'am argasas ket daoust ma oa sammet gant ur gwalleur pounner : henn kuzhat ouzhin eo a reas er c'hontrol dre haelded kalon ha dre asaouez evidon. Daoust hag unan a zo herberc'husoc'h eget hennezh e-touez Tesaliz hag e-touez tud Bro-Hellaz ? A-dra-sur ne lavaro ket en devo graet vad da unan dic'hrad hag eñ ken hael e ene.

(Mont a ra kuit. Chom a ra goullou ar c'hoarilec'h. Dont a ra Admetos en-dro a-unan gant ar c'hor, war e lerc'h an ambrougadeg.)

ADMETOS

Siwazh ! Distro doanuis, gweledigezh doanuis va zi-anez intañv ! Da belec'h mont ? E pelec'h chom a-sav ? Petra lavarout ? Gant ma c'hellin mervel ! Pounner eo e gwirionez an Tonkadur m'am ganas va mamm evitañ. Avi am eus ouzh an Anaon, karout a rafen mont ganto, en o ziez em eus c'hoant da ober va annez rak ne vourran ket o sellout ouzh ar gouloù hag o vale gant va zreiz war an douar, ken uhel-briz m'eo ar gouestl en deus diorblet diganin an Ankou evit e zaskoriñ da Hades.

AR C'HOR

Deus war-raok, deus war-raok ! Deus tre da greiz an ti !

ADMETOS

Siwazh !

AR C'HOR

Diwasket ec'h eus poanioù ma c'haller difronkañ diwarno.

ADMETOS

A ! A !

AR C'HOR

Erru out e penn hent ar boan, henn gouzout a ouzon.

ADMETOS

Siwazh ! Siwazh !

AR C'HOR

Evit an hini a zo aet d'an Traoñ ne c'haller ket mui netra.

ADMETOS

Gwa me ! Gwa me !

AR C'HOR

Chom hep gwelout ken dremm ur bried karet, na pebezh kalonad kriz !

(C'hoarigan)

ADMETOS

Kounet ec'h eus pezh a rann va c'halon. Pe walleur e gwirionez a zo brasoc'h d'ur pried eget koll ur bried karet ? Gwelloc'h em bije graet o chom hep dimeziñ hag hep ober va annez biskoazh en ti-mañ ganti. Gwarizi am eus ouzh ar re n'int ket dimezet ha n'o deus bugel ebet. Ned int prederiet nemet gant ur vuhez, 'o hini, ha drezi ne ziwaskont ket poanioù dreist-muzul. Hogen kleñvedoù ar vugale, ar gwele eured drastet gant ar marv, seurt traoù ne c'haller ket andur, dreist-holl pa'z eus tu da dremen betek an diwezh hep bugale na gwreg.

AR C'HOR

Gant un tonkadur distourmus out degouezhet.

ADMETOS

Allaz !

AR C'HOR

Ha ne lakaaz termen ebet d'az kalonad.

ADMETOS

Allaz ! Allaz !

AR C'HOR

Pounner eo da badout outi ... ha koulskoude.

ADMETOS

Siwazh ! Siwazh !

AR C'HOR

Gouzañv ! N'out ket an hini kentañ en deus kollet ...

ADMETOS

Gwa me ! Gwa me !

AR C'HOR

... ur wreg. Ken lies-gwisket hag an dud gwasket gantañ eo ar Reuz.

ADMETOS

O kañvoù ha melredoù hir m'eo abeg dezho ar re garet diskennet dindan an douar ! Perak ec'h eus miret ouzhin d'en em stlepel e don foz kañvus ar bez hag en em astenn, divuhez, e-tal ar vaouez dispar-se. Daou ene e-lec'h unan en defe kemeret Hades war-un-dro, ar re fealañ an eil d'egile : a-gevret o defe treizhet al lenn isdouarel.

AR C'HOR

Unan a oa kar din. E unvab, ur c'hrennard dellezek e leñved dezhañ, a dremenas en e di. Hogen gouzañv a rae e walleur gant reizh evelkent, petra bennak ma oa o tenesaat (deut ma oa war an oad), ouzh koulz-amzer ar blev gwenn.

(Emañ Admetos dirak an ti)

ADMETOS

A ! Skeudenn va zi ! Penaos mont dreist d'az treuzoù ? Penaos e chomin ennout pa'z eo eilpennet va flanedenn ? Siwazh ! Nag hir eo an hed ! Gwechall, gant etivi-goulaouñ ar Pelion hag ouzh kanennoù an eured eo e teuen tre. Bleniañ a raen war-bouez he dorn va fried karet hag un amheuliadeg

safarus a zeue war hol lerc'h hag a rae gourc'hemennoù din ha d'an hini a zo marv hiziv : lavarout a raent e oa klodus hor gourdadoù hag e ereemp hor buhezioù a dennemp an eil hag egile diouzh ar gwellañ tiegezhioù. Bremañ avat eo deut ar c'heinvanoù e-lec'h ar c'hanennoù hag e-lec'h ar gouelioù gwenn eo deut an dilhad-kañv da'm c'has betek liñserioù digenvez va gwele.

AR C'HOR

Chafsus e oa da blanedenn ha deut eo ar glac'har d'az kavout pa oas dio'housvez eus ar walleur. Da vinanañ ec'h eus saveteet da vuhez, tennañ a rez da anal. Marv eo da bried, dilezet he deus da garantez : petra nevez a zo aze ? Kalz tud endeo a zo bet disrannet gant an Ankou diouzh o fried.

ADMETOS

Mignoned, planedenn va gwreg a zo chafsusoc'h eget va hini, a gredan, daoust d'ar pezh a seblant bezañ. Rak poan ebet n'he zizho mui biken, ha dija eo deut termen brudek hec'h enkrezioù. Me, avat, ne zleen ket bevañ ha goude mont diouzh taol an eur tonket e renin hiviziken ur vuhez azrec'hus. O paouez henn kompren emañ. Penaos eta em bo kalon da vont e-barzh va zi ? Ouzh piv komz ? Piv a gomzo ouzhin ken e c'hallfen kacout dudi oc'h antreal ? Pe war du treiñ ? Kerkent ha deut e-barzh em c'haso kuit en-dro an digenvez, pa welin gwele goullou va gwreg, ar c'hadorioù ma azeze warno, ha dindan va zoenn al leur poultrennek, pa hirvoudo d'o mamm ar vugale o kouezhañ e-harz va daoulin, pa leñvo ar revelion d'ur vestrez ken mat aet kuit marv diouzh an ti. Kement-se a zo ouzh va gortoz er gêr. Hag er-maez em pellaio euredoù Tesaliz ha bodadegoù ar maouezed. Sed pezh a lavaro kement hini en deus kasoni ouzhin : "Gwelit an hini a vev gant ar vev, n'en deus

ket kredet mervel, hogen daskorifi a reas da bae an hini a gemeras da wreg, dre zigalon, evit mont diouzh Hades. Ha goude-se e kred dezhañ ez eo un den ? Kasaat a ra e gerent pa nac'he-eñ mervel." Setu penaos e vin gwall-vrudet ouzhpenn va gwalleurioù. Da betra e talvez din bevañ, mignoned, peogwir e vin disenoret ha gwall-eyurus ?

AR C'HOR : Poz I

Evidon-me, o vale a-dreuz tachennoù ar Mousenned, on denijet d'ar vann ha taffvaet em eus kelennadurezhioù niverus. Netra kreñvoc'h eget ar Ret n'em eus kavet avat. A-enep dezhañ n'eus louzoù ebet da glask war daolennouigoù Trakiz a voe engravet diwar gomzoù Orfeus, nag en holl remedoù a roas Foebos d'an Asklepidi o taz-troc'hañ louzeier evit bediz gwasket gant lies poan.

Enep-poz I

Hounnezh eo an doueez nemeti n'eus ket tu da zenesaat ouzh hec'h aoterioù hag he skeudenn brem : ne glev ket an aberzhioù. Â gehelus ! Salv na zeui ket da waskañ va buhez pounneroc'h eget diagent ! Pesh a c'hourc'hemennas Zeus en ur hejañ e benn, a-drugarez dit henn peure'hra ha damesaat a rez gant da nerzh houarn C'halubis rak n'eus elevez ebet gant da youladenn c'harv.

Poz II

Ha te ivez, gant liammoù didec'hus he daouarn az pakas an doueez. Pleg avat : rak ne gasi ket en-dro biken d'an Nec'h ar re dremenet aet d'an Traoñ. Mibion an doueed o-unan a steuz e teñvalijenn ar marv : karet e oa pa oa en hon touez, karet e vo c'hoazh hag hi marv. Ar bried haelañ-holl az poa kevredet gant da wele.

Enep-poz II

Na veze ket brudet bez da bried evit bezañ krugell-gañv

ar re dremenet, hogen bezet-hi enoret e-giz an doueed o tegas azacuez d'an tremeniad. Hag unan bennak oc'h ober ur c'hildro a lavaro kement-mañ : "Houmañ a varvas gwechall evit he fried. Bremañ avat ez eus anezhi un arc'hwere gwenvidik. Kevarc'h ! Â gehelus ! Bez tuet mat deomp !" Seurt komzoù eo he c'hevarc'ho.

AR C'HORVLENIER

Setu ganiad Alkmene, a gev din, Admetos. Emañ o kerzhout etrezek da oaled.

(Diboufañ a ra Herakles. Ur vaouez oueliet a zo krog en e zorn.)

HERAKLES

Ouzh ur mignon e ranker komz didro, Admetos, hag an tamalloù eo arabat tevel warno hag o mirout e don ar galon. Soñjal a rae din avat e oa un dra natur bout gwiriet evit da vignon p'edon-me ez kichen e-kreiz da walleurioù. Hogen ne zispleges ket din e oa korf da wreg an hini a oa lakset e gwel; er c'hontrol, reiñ a raes degemer din evel pa vijes prederiet gant kañv un estren. Garlanteset em eus va fenn, ha d'an doueed em eus graet died-kinnigoù e-barzh da di reuziet gant ur gwall-donkadur. Ya, da garezifi a ran, hag a ran dre ma'z eus bet graet ouzhin en doare-se. Ha padal ne felle ket din da zoaniañ e-kreiz da walleur. En arbenn e betra ez on deut amañ war va c'hiz, emañ o vont da lavarout dit. Kemer ha diwall ar vaouez-mañ ken na zistroin en ti-mañ gant keseg Trakiz goude bezañ neget roue Bistoniz. Ma c'hoarvez ganin ar pesh a zihetan a-greiz kalon (plijet gant an doueed e teufen en-dro !), e roan houmañ dit da servijañ ez ti. Bec'h bras a voe warnon d'he c'haout etre va daouarn. Setu penaos : kejout a ran war va hent gant tud oc'h embreger c'hoariadegoù a dalv ar boan d'ur gourenour en em skuizhañ enno. Diouto e tegasan

en-dro houmañ am eus degemeret e-giz priz va zrec'hadenn. D'ar re drec'h er c'hoarioù skañv e oa kezeg da gas ganto, d'ar re drec'h er c'hoarioù diaesoc'h, dornataerezh ha gouren-erezh, e oa pennoù chatal. Ur vaouez a oa ouzhpenn-se. Peogwir edon eno e vefe bet mezh din tremen hep kaout ar gounid brudek-mañ. Evel m'em eus lavaret avat, ret eo dit intent ouzh ar vaouez-se. Rak n'em eus ket he laeret, hogen pezh am eus bet war-bouez va foan eo a zegasan dit. Dre ma tremeno an amzer e teui-te ivez da gavout mat pezh a ran marteze.

ADMETOS

N'eo ket a-dra-sur diwar fae na dre m'az lakaen da enebour din em eus kuzhet ouzhit planedenn drist va gwreg. Hogen ur glac'har all sammet war va glac'har e vefe bet ma vefes loc'het war-du ti un ostiz all. A-walc'h e oa din leñvañ war va gwall-aur. Ar vaouez-mañ avat, ma c'hell bezañ, me az ped, brenin, ro urzh d'he diwall d'un Tesalind ha n'en devo ket bet reuz e-giz m'em eus bet. Kalz a ostizion ac'h eus e Feres : na zegas ket din da goun va gwall-verzh; ne c'hallfen ket derec'hel war va daeroù; war va droug ne daol ket un droug all ouzhpenn; a-walc'h on sammet gant va reuzeudigezh. E pelec'h em zi e c'hallfe bezañ maget ar vaouez yaouank-mañ ? Rak yaouank eo evel m'eo anet diouzh he gwiskamant hag he bragerizoù. Daoust hag ober a ray hec'h annez e-touez ar wazed pa vo dindan va zoenn ? Penaos e chomo-hi divoulc'h, hag hi o vonedone e-mesk ar baotred yaouank ? Ar yaouankiz, Herakles, n'eo ket aes derec'hel warni; er pezh a zo talvoudus dit e soñjan-me. Daoust hag he degas hag he bevañ a rin e-barzh kambr an hini varv ? Hogen penaos he lakant e-barzh gwele hounnezh ? Daou damall a zoujan : tamall va fobl; rebechet e vo ouzhin trañsañ va madoberourez o kouezhañ e-barzh gwele ur vaouez yaouank all.

Ha tamall an hini varv : dellezout a ra em befe azaouez eviti, va freder a zle bezañ ganti da vat.

(Ouzh ar vaouez :)

Te avat, maouez, piv bennak ez out, ra ouezi out kement hag hi, ez eo heñvel da gorf ouzh hec'h hini.

(O tifronkañ :)

Allaz ! Kas kuit, en anv an doueed, pell diouzh va daoulagad, ar vaouez-mañ. Rak kavout a rin ouzh hec'h arvestiñ gwelout va gwreg-me. Strafulhet eo va c'halon hag eus va daoulagad e strink stivelladoù daeroù. Â reuzeudig ac'hanon rak kregiñ a ran da dañva pegen c'hwerv eo va c'hañv.

AR C'HORVLENIER

Ne c'hellan-me ket kavout brav an degouezhadenn-mañ. Dav eo avat, petra bennak ez eo, plegañ da zonezon un doue.

HERAKLES

Gant m'em befe bet ur galloud kreñv a-walc'h evit degas en-dro da wreg eus Tiez-an-Traoñ d'ar goulou hag aotren dit an trugarez-se !

ADMETOS

Gouzout a ran az pefe karet henn ober. Penaos avat ? Ne c'hell ket ar re varv dont en-dro d'ar goulou.

HERAKLES

Na c'hwez ket da c'hlac'har hogen gouzañv en un doare dereat.

ADMETOS

Aesoc'h ez eo aliañ eget kiañ ouzh ar boan.

HERAKLES

Petra a c'hallfes gounit o klask keinal dalc'hmat ?

ADMETOS

Gouzout a ran. Hogen stlejet on da heul ar c'hoantad-se.

HERAKLES

Gwir eo, karout unan marv a laka an den da ouelañ.

ADMETOS

Kollet em eus va buhez ganti, ha muioc'h c'hoazh eget a lavaran.

HERAKLES

Ur vacuez dispar ac'h eus kollet, den n'am dislavaro.

ADMETOS

Ken n'eus ket mui evidon dudi ebet er vuhez.

HERAKLES

Da boan ne vo ket mui ken kriz gant an amzer : yaouank eo c'hoazh.

ADMETOS

An amzer a c'helles lavarout, mar deo mervel an amzer.

HERAKLES

Ur vacuez all, un dimezi all a zistano da geuz.

ADMETOS

Ro peoc'h; petra ac'h eus lavaret ? N'em bije ket kredet.

HERAKLES

Petra ? Ne zimezi ket hag intañv e ohomo da wele ?

ADMETOS

Nikun ne gousko em c'hichen.

HERAKLES

Daoust ha rentañservij d'an hini varv a gredez ober ?

ADMETOS

Hounnezh, e pelec'h bennak emañ, a zlean kehelañ.

HERAKLES

Mat-tre, mat-tre. Hogen lavaret e vo ez out trevariet.

ADMETOS

Biken n'am anvï pried.

HERAKLES

Meuliñ a ran e chomfes feal d'az karantez evit da bried.

ADMETOS

Ra varvin ma vezan trubard dezhi daoust m'eo marv.

HERAKLES (O pegañ e dorn ar vacuez evit e lakaat krog e dorn Admetos)

Resev houmañ neuze ez ti uhel.

ADMETOS

En anv Zeuz az engehentas, na ra ket, da aspediñ a ran.

HERAKLES

Padal e ri ur fazi o chom hep henn ober.

ADMETOS

Ma ran e vo debret va c'halon gant ar glac'har.

HERAKLES

Selaou ac'hanon hag e koulz marteze e vi hegarat.

ADMETOS

Siwazh ! Gant ma vijes chomet hep he degemer biskoazh er c'henstrivadegoù !

HERAKLES

Lakaat a ran va brec'h da genlod dit.

ADMETOS

Komzoù brav a zeu ganit; ra'z aio kuit ar vacuez-mañ avat.

HERAKLES

Mont a ray kuit diouzh ret : klask gouzout ha ret eo avat.

ADMETOS

Ret eo gant ma ne vi brouezet en abeg da-se.

HERAKLES

An dra-se a c'hoantaan dre ma cuzon un dra bennak.

ADMETOS

Bez trec'h eta; hogen ne rez ket plijadur a dra-wir.

HERAKLES

Padal e teuo un deiz m'hor meulo : selaou ac'hanon.

ADMETOS (Ouzh ar vevelion)

Elegnit-hi peogwir e rankan he degemer er gêr.

HERAKLES

N'on ket evit he daskorif d'ar vevelion.

ADMETOS

Dit-te eo he degas er gêr ma karez.

HERAKLES

Ne rin ket; he reiñ dit etre da zaouarn a rin avat.

ADMETOS

Ne c'hellin ket stekiñ outi : ar gwir he deus da vont tre avat.

HERAKLES

N'em eus fiziñs nemet ez torn dehou dit.

ADMETOS

Va rediañ a rez da ober kement-mañ pa ne fell ket din.

HERAKLES

N'ez pezh ket aon da astenn da zorn ha stekiñ ouzh an estrenez.

ADMETOS (Oc'h ober evel ma lavar Herakles en ur dreif e benn)

Mat ! Astenn a ran an dorn.

HERAKLES

Evel pa vijes o troc'hañ penn ar Gorgonenn. Krog out enni ?

ADMETOS

Krog on.

HERAKLES

Ma ! Dalc'h krog enni ha diskleriañ a ri un deiz ez eo mab Zeus un ostiziad hael.

(Deneseat a ra ouzh ar vaouez ha lemel diwarni ar ouel)

Sell outi : daoust ha n'he deus ket doare da vezañ

heñvel ouzh da wreg ? Laosk ar glac'har, evurus ma'z out. Alkestis hag o kilañ)

ADMETOS (O tiskregiñ diouzh dorn

Â zoueed ! Petra a lavarin ! Dispiat burzhud hennezh ! Va gwreg a welan e gwirionez ? Pe ul Levenez kaset gant un doue droukyoulet a drefu va spered ?

HERAKLES

N'eo ket, hogen gwelout a rez da bried-te.

ADMETOS

Diwall na ve hemañ ur spezh eus an ifernioù !

HERAKLES

N'eo ket blenier-anaon an ostiziad ac'h eus degemeret.

ADMETOS

An hini am eus beziet a arvestan avat, va fried din-me.

HERAKLES

Hep mar ebet. N'on ket souezhet ez pefe disfiz en degouezh-mañ avat.

ADMETOS

Stekiñ a rin outi ? Komz outi evel pa vefe va fried bev ?

HERAKLES

Gri. Dit-te eo kement tra a fell dit kaout.

ADMETOS (O stardañ Alkestis a dro-vriad)

Â zaoulagad ha korf va gwreg vuiañ karet, ho piaouañ a ran en-dro daoust d'am dic'hoanag, pa greden n'az kwelfen mui biken.

HERAKLES

Piaouañ a rez : arabat eo e teufe gourvenn an doueed avat.

ADMETOS

Â vab uhelouenn Zeus meur, ra vi evurus ha r'az tiwallo an tad az engehentas, rak n'eus nemedout-te en deus lakaet

en-dro va zraoù war o zu. Penaos avat ec'h eus degaset houmañ eus an Traoù d'ar Gouloù ?

HERAKLES

En em gannet on gant an doue a ren war ar re varv.

ADMETOS

E pelec'h, lavar din, out bet oc'h en em gannañ gant an Ankou ?

HERAKLES

En em guzhet e oan e-tal ar bez ha sailhet em eus warnañ ha kroget ennañ war-bouez va divrec'h.

ADMETOS

Perak avat eo divouezh c'hoazh va gwreg ?

HERAKLES

N'ec'h eus ket aotre d'he c'hlevout o komz a-barzh ma vo bet digousiet hag hi bet gouestlet da zoueed an Traoù : ret eo gortoz ken na vo degouezhet trede tarzh-an-deiz. Deren-hi avat e-barzh an ti ha chom reizh evel-henn hiviziken, Admetos, douj an doueed oc'h intent ouzh an ostizidi. Kenavo. Me a ya avat da seveniñ an trevell bet kinniget din gant mab Stenelos.

ADMETOS

Chom ganeomp : ra vo hon oaled da genlod dit.

HERAKLES (O pellaat)

Ur wech all e rin. Bremañ avat a rankan difraeañ.

ADMETOS (O kimiadiñ)

Hama ! Chañs vat dit ha ra gerzhi en-dro gant hent an distro.

(O treiñ war-du an nor :)

D'ar c'hêrioù ha d'ar peder rannvro e roan an urzh-mañ e-keñver an darvoudoù evurus-mañ : ra vo savet lazioù-kanañ, ra bigno a c'horre an aoterioù maged aberzhioù ar bioù a

zedenn an trugarez. Rak hiziv hon eus bet en eskemm ur vuhez welloc'h eget kent. Evurus on, ne fell ket din nac'hañ.

(Mont a ra tre er palez krog e dorn Alkestis)

(C'hoarigan)

AR C'HOR

Lies-stumm eo an Tonkadur. An doueed a seven kalz traoù dispi. Ar pezh e oad en gortoz anezhañ n'eo ket peure'hraet; d'ar pezh a zo dic'hedet e kav an doueed un ode.

) o ((

# PREDER

Koumanant 12 niverenn ..... 45 FF.  
Koumanant d'ar Geriadur Istorel  
hepken (4 niverenn)..... 15 FF.  
Koumanant hep ar Geriadur Istorel (8 niverenn)..... 30 FF.

Rener : G. ETIENNE

Embannerez : P. KERMOAL

Sekretouriezh: Preder, 30 place des Lices, 35 - Rennes

An arc'hant da: M. G.ETIENNE, CCP 16 093 13, Paris

Pevare trimiziad 1968

Priz ar c'haier-mañ 4,50 FF.

Moulet gant SADED

CPFP Nn 35.709

Diskleriet hervez lezenn, Pevare trimiziad 1968

© 1968, Preder hag an aozurion.

